

PLOUVOUSKAN (1)

Ar werzik-man a ve kanet war don *Santez Mari*,
pe ar *Zoudard iaouank*, pe eunn all.

Eunn de benag e kleviz e-barz eur goz derven,
Eunn evn bian o kanan eur vrao a ganouen,
Eunn evn bian o kanan, kanan 're brézonek,
Me 'garfe ho pe klevet, he zon a óa ker c'houek !

« Kan ive gand ar Barzed, eme ann evn bian,
« Er memez koad e klever estig ha laouenan. »

Hag evel eul laouenan e-mesg ann estigo,
Barzig en-touez ar Barzed, em euz stumet gwerzo.

Bean 'zo en Breiz-Izel, enn-hi douar dervek,
Tro-dro d'ei mor o krozal, tro-dro gouriz gerek,
Bean 'zo en Breiz-Izel eur vroig vrao mar zo,
Eur vroig hag a garan, Plouvouskan hec'h hano.

En douaro Arvorig n'euz ket muoc'h santel ;
Kouls ha Gwened ha Kemper, San-Brieg ha Kastel,
Kouls ha penn-ker Landréger gant Tual hag Ervoan,
Plouvouskan 'n euz Sent ive, Koneri hag he Vamm.

E-tal beio ar zent koz pep bro n'euz hec'h iliz,
Hec'h iliz koant ha pleustret out-hi tourio diskuiz ;
Goude lakât da gentan ar c'herio-eskohti,
Ne vano ket da zivoan, n'eo gouir, bro Koneri ?

(1) Darn a lar *Plougouskant* elec'h laret *Plouvouskan*.

Mistr ha kempenn eo zavet da iliz, Plouvouskan, [kan.
Mistr ha kempenn uz d'ar mor gant he c'horsen gwenn-
Pa plijo gand sent ar vro dont breman d'hen gwelet,
N'en evo ken Koneri mez d'ho zigemeret.

Bean 'zo en Breiz-Izel eur vro hag a garan !
Plouvouskan, bro ann dud vad, eur vro ar zantelan
O ! nan den n'em dislaro : ar vein hag ar c'hleier
A zavfe a-du gan-in da vougan ar gevier.

N'eo ket ker stag ar gerek ouz od ar C'hastel-Meur
Hag ar Fé enn ez kalon, Plouvouskanad, ma breur .
Roet e 't euz da Doué ha roet hep zellet :
Kers ! Doue ez pinnigo, goud a rez hen karet.

Er paroujo tro-war-zro ne c'hoantai mu tra,
Rag e-touez ann Ilizo d'hini 'zo ar c'haera,
Da gleier 'vel ann ogro a zon 'nn ho zour huel,
Ho mouez evel trouz ar mor o skei ouz ar rec'hel.

Breman zond e vo kant vla Aogustin ar Minter
A gwitae da viken he Eskopti Treger ;
'Nn he za enn od Plouvouskan, a-rog mond da Vro-Zoz,
Da Blouvouskan e roaz he diwean bennoz.

Bennoz ann Eskop Zantel euz he vro argaset,
A zo war-n-out, Plouvouskan, bete vreman chomet,
Mar 'g out ken don en kalon Aogustin San-Brieg,
Bennoz ann Otro Minter a zo ive kiriok.

Ha kaeran dé ! hon Iliz da Doue 'zo gwestlet !
D'ho péan, Eskop santel, n'on petra 've roet :
Sant Koneri a bedfomp evid-hoc'h-hu bemde,
Hag otro sant Koneri a beo sur hon glé.

Mez evid ar Person mad n'euz labouret bemdé,
'Vit Chaloni Plouvouskan, trugare, trugare !
Poezet hoc'h euz he daero aboue parouz Eviaz
Hag ar Zül-fask a zo deut goude Gwéner-ar-groas.

Pa deuin da goll kalon, daoubléget enn ero,
Pe ruskellet ma bagik gand ar mor re c'haro,
E tolin me eur zellik war ann iliz neve,
Ar groaz du-hont 'barz ann er em c'hennerzo neuze.

Béan 'zo en Breiz-Izel eur vro hag a garan !
'Tal hec'h iliz enn dizheol e rin ma hun diwan,
Euz Plouvouskan me 'ielo da zi Doue, er gloar,
Pa eo gwir em o dean zavet ti war douar.

Da derc'hel zonzj euz ann de ma eo bet konsakret,
Konsakret hon Iliz koant ma zon a zo zavet :
Kanet-hi, Plouvouskaniz, kanet-hi 'ta bemde,
Ann hini 'n euz hi stumet 'zo unan euz ho re.

KONERI PLOUVOUSKAN.

Er bemzekved a viz Gwengolo, 1878.